



GOUEL ZANT ERVOAN

7. 8. 9. A VIZ GUENGOLLO 1896

WAR DON : { *Heureux le cœur fidèle.*
Ervuruz ar bobl kristen.

DISKAN :

Zant Ervoan, mignon Doue,
En de-ma a dudi,
Breiz-Izel gant karante
A-dired d'ho pedi. (bis).

1.

Zeder d'iliz Landreger
Diredomp, Bretoned ;
Da Zant Ervom eur be-kaer
A-neve zo zavet. (bis).

2

II.

Fe eun duk a Vreiz-lzel,
Brema vo pemp kant vla,
A zavas d'an den zantel
Eur bé euz ar c'haera.

III.

Hon zud koz euz ar bé-ze,
Enn ho zrubuil ha poan,
A gavas, da bep mare,
Sikour vad Zant Ervoan.

IV.

Mez eun dé, dé a c'hlac'har !
Divroadet direiz
A diskaras d'ann douar
Kaera bé oa enn Breiz.

V.

War ar min ru, kristenien,
A-bell-zô ni bede ;
Mes daëco oa 'n hon feden,
Re dister oa, ar bé !

VI.

Kenavo tristidigez,
Huanad ha daëro ;
Zant Ervoan 'n euz a nevez
Kaera bé zo er vro.

VII.

Bennoz d'ann Otro Bouc'hé,
A oa Eskob a-boan,
Digant Breiz pa c'houlenné
Eur bé da Zant Ervoan.

VIII.

Bennoz d'ann Otro FALLIER,
Gwir Vreizad a galon,
En euz zavet gouelio kaer
D'inori hon Patron.

IX.

Oll hincho Breiz zo re voan,
Re striz eo Landreger,
Evit mignonet Ervoan
Diredet gant preder.

X.

Euz ar bé, d'he vinniga,
Ema Eskibien Breiz ;
Ar bobl tro-zro, hep skuiza,
Euz ar Zant a zell piz.

XI.

He dremm zioul ha zantel
D'ar c'hristen a laro
Beva eus gallout mervel
Hep douja ar maro,

XII.

War bé ar Zant binniget
E welan tro-var-zro
He gerent, he vignonet
Eskibien koz hon bro.

XIII.

A-ust, ar Werc'hez Vari,
En-dro d'ehi œle,
Em c'halon a lak dudi
Fianz ha karante.

XIV.

Euz ho pé, o Zant Ervoan,
Vel gwez-all hon Zado,
Pa vo jœa, pa vo poan,
Kalonek ni bedo.

P. E.

Ma Jezuz misericord!

100 de induljans.

Permis d'imprimer.

Saint-Brieuc, le 28 Août 1890.

Pour Mg. l'Evêque
Le Vicaire général délégué :

M. LE PROVOST.
Archid. de Tréguier.

(PROPRIÉTÉ.)

Landreguer, ar FLEM, Noular.